

Quellien Narcisse (Ar Roh-Derrien 1848 – Pariz 1902)

Breiz : barzonegou

Bet embannet e 1898.

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Viou-koukoug ‘zo er skrid bet moulet e 1898. Evel an darn-vuia euz skrivagnerien an amzer-ze e kemmesk ar rannouigou-verb **a** hag **e**. Reizet int bet.

Taolenn

Son ar chufere

Bale Ahez

Perinaig

Ar re hlaz

Ar vorverh

Mein-bez

An overn wenn

Landreger

Noz an Nedeleg

Gwerz ar vartoloded

Kanaouenn ar miliner

Pok ar maro

Huñvre

Son an nevez-amzer

An distro

Baro spern hag ivin

Son ar chufere¹

Ouz taol 'oa c'hoaz tud an eured,
Broudig an Dall pa'z eo klevet.

Gand e gi, ar baleer bro
O pateri² ouz an treuzo'.

« Dall ha daonet ! an aluzon
Az-po mar kanez dim euz zon. »

E skud³ 'n e zorn gand pep hini,
Krog an diskan war leur an ti.

*

Skuill ha skuill, ev da ruill,
Chufere, n'evet re.

Mad e' gwin ruz d'ar Halloed⁴
Evel dour red d'al lapoused ;
Chufere o-deus ar Vretoned.

Breizad a dañva chufere
N'anzav da vestr nemed Doue ;
Ha kalz n'e' ket Doue 'vite.

Ken dous eva chufere mel
Ha kemer pokig dimezell :
Diwall a gement-se 'zo gwell.

Biskoaz roue ar Vretoned
Gand ar Zaozon⁵ n'oa bet trehet,
Gand ar zehed ne laran ket.

Eur rumm daouzeg a varheien,
'N o zouez eur briñsez bleo melen,
'Oant o koania 'n eun enezenn.

Blondinenn⁶ skuille da eva,
Gwad paun 'fotas⁷ da genta
Er chufere, 'vid o skañva.

En eil skudellad⁸ gwad er-wiber⁹ :

¹ chufere : bet skrivet "chupere".

² pateri : lavared "pater noster".

³ skud : skudell.

⁴ d'ar Halloed : tud ar vro Hallo.

⁵ ar Zaozon : on amezeien dosta, brezel ganto bepred.

⁶ Blondinenn : ano ar plah bleo melen.

⁷ 'fotas : 'veskas

Hag int e-kreiz ebatou kaer
D'en em daga 'vel loened taer.

Gwad eur porhell er skudellad all :
Ha kerkent int kouezet mezo-dall,
Hi¹⁰ o c'hoarzin gand sellou fall.

Ha krog en korn-boud ar roue,
Siwaz d'ar Zaozon... – Hag abaoe
Emañ Breiz dindan gazell-gê.

Skuil ha skuill, ev da ruill ;
Chufere, n'evet re.

*

N'ao ket ar ganaouenn paket¹¹,
'Vel sonerien m'oant stlabezet,

'Oant stlabezet dinad an daol
Gand nao skudellad, unan bep taol¹²

« *Requiescant* ! me Broudig,
'N eur vond en hent leun e zahig.

⁸ skudellad : skullad, er skrid orin.

⁹ er-wiber : gwad eun naer-wiber.

¹⁰ Hi : ar Vlondinenn.

¹¹ paket : echuet.

¹² unan bep taol : unan bep poz.

Bale Ahez

War Menez-Hom pa bar al loar,
Pleg Douarnenez 'zo dispar.

'Vel ma tosta d'an abardaez,
Ar pesketaer 'traoñ d'ar menez

Ar pekataer 'dro ha distro,
A dro da zeha e rouejo' ;

Azezet goude da hortoz
Bete ma vo kouezet ar zerr-noz,

'Mañ o selaou mouez an avel,
Eur vouezig-noz a zav a-bell.

*

« N'e' ket ar hoabr 'tu all d'ar mor
A weler bemnoz o tigor ?

Kuzet an heol, n'e' ket bemnoz
'Tigor du-hont ar baradoz ?

Ha 'hed an trêz, piou 'ta 'klever,
O kana, lar din, peketaer ? »

An den-a-vor en-deus laret :
« Dor vraz ar baradoz n'e' ket,

Nemed eur gêr 'zav d'an oabl splann,
Eur gêr veur euz¹³ ar poull ledan.

Sell an ti-kêr¹⁴ e traoñ an dour,
Eun iliz gand he geridour¹⁵.

Ha sell o vond d'an abadenn
Gand he marheg ar Vlondinenn.

Bremañ selaou ken kuñv e kan
War an trêz an avelig hañ¹⁶,

D'ar gerreg 'vel stok al lano,
'Vel-se seiz¹⁷ en ebato'.

¹³ euz : a zav euz

¹⁴ an ti-kêr : ar palez.

¹⁵ geridour : savenn. (an tour e savenn).

¹⁶ hañ : hañv.

¹⁷ seiz : eur vroz seiz.

« Lavar¹⁸ ‘ri din-me, pesketaer,
Pa sked ar stered en obal sklêr,

Perag, stered krog da lugern¹⁹,
An ebato ‘gouez d’an ivern ?

« Ar gêr-Iz ‘zo kousket du-ze
Gand Ahez dindan kazell-ge.

Ar verh ‘diroll an abadenn
Bemnoz evid he finijenn ;

Ha tro pleg-ar-mor greet ganti,
‘Tiskenno c’hoaz d’he finiti :

Tebet e-pad ma tremeno,
Rag diou glaouenn tan he sello.

Ma ne ve Doue d’am zikour,
War he lerh ‘afen ‘traoñ an dour. »

Med ‘ra sin ar groaz ar paotr-kêz
Pa glev o ruza broz Ahez.

¹⁸ Lavar : lavared

¹⁹ lugern : lugerni.

Perinaig

I

« Demad hirie deoh er gêr-mañ.
Diou blahig yaouank a glaskan,

Diou vinorez eet 'mêz ar vro
Bremañ eur bloaz bennag a zo,

Unan anvet Perianig...
« Baleer-bro, 'vid bremaig

Az-po kelou gand ar Zaozon,
Kelou da vantra da galon. »

« Laret din perag ar hleier,
'Vid d'ar zul, tiñs ar hlaz e kêr. »

« Kloh ar basion 'zo 'tiñsed
D'eur plahig d'ar maro barnet ;

Kee war dachenn an iliz vraz,
M'eo dit da weled kañv, siwaz ! »

II

Daou chafot 'zo gwintet aze,
Keuneud a zo berniet etre;

War eur chafot 'mañ ar barner,
Egile 'vid ar prezegeer.

Ha tro-a-dro dre an dachenn
Nemed soudarded a-vandenn ;

Hag eur groz vraz gand ar Zaozon
O tohal : « Pegoulz ar pardon ? »

Degaset 'traoñ d'ar bern keuneud
Diou verh a zo ken mistr ha treud,

Mistr 'vel an heizez er hoajou
Ha treud treutoh 'vid eun ankou,

Abaoe c'hweh miz krenn kastizet,
Ken oa truez ouz o zelled :

Unan en du, da vervel rez ;
Eben en gwenn, kañv ar werhez.

Pa stokas ouz ar bern uhel,

Fazias ‘vel eur bugel..

Ar Zaozon ‘lare d’ar beleg :
« Prezeg anezi, hast prezeg. »

« Abalamour d’ho pehejo’,
Perinaig, et d’ar maro ;

Heuliet ganeoh ar zorserez...
Me ‘gav Janedig eur zantez. »

Ar Zaozn ‘youhe ‘vel bleizi.
« Gwenn an erminig », emezi ;

« Dinamm ‘vel-se an erminig
‘On da Doue chomet koantig. »

Kaer o-deus trubuill da nehi,
Perinaig ne lavar mui ;

Na mui n’zelaou, pleget he fenn,
‘Vel ma vije ‘n eur zoñjadenn²⁰ ;

‘N he lagadig glaz an daero’,
A-walh he halon keun d’he bro.

Eur berr huñvre, berr huanad.
« Sammet, emeze, war ar bern koad. »

Hga o tistrei d’he mignonez :
« Lar evidon eur ganenn gêz.

An hini peb abardaez ‘kanem²¹,
Evid ma zikour da dremen. »

Ha diou vouezig a zo savet ;
Ha Perinaig ‘zo klevet,

En eru bignal gand he halvar,
Kana dous klemmgan a hlahar.

III

Pell diouz ar vro a garer eo garo da vervel !
Allaz ! ken pell da guz-heol ha du-hont Breiz-Izel
Ma bro gêz Breiz-Izel.

Ar valaneg ‘zo ledan ‘vel an oabl da greiste’,
Leh e klemm ‘vel anaon an avel d’abardae’

²⁰ eur zoñjadenn : eur zorbienn.

²¹ ‘kanem : en on toull-bah.

A avel abardae’.

Dindan eun troad radenenn eur gudon ‘zo neizet,
Kouldri steuet gand kevnid ‘mesk ar gliz alaouret
Ar hlizenn alaouret.

Er hoajou don ‘zo pelloh an noz a zo du-dall ;
Eno ‘mañ al loened gouez ‘hed an noz o vlejal,
‘Hed n noz o vlejal.

Hag ivez tro pad an deiz, deuz al liorz d’ar hoad,
Emañ kludet en deliou an evned o vegelad²²,
Evned o velegad.

Evuruz ‘vel an êlez ‘tiskanont peb amzer,
StrafUILLET an neñv gante ‘vel bili ‘n dour sklêr,
Bili kouezet en dour sklêr.

Pa zave bannah avel, bemnoz diwar ma dor,
‘Sellen ar hoabr o ruza ‘vel listri war ar mor
Al listri war ar mor

E-barz iliz ma farrouz eo kaer an ofiso’,
Hag ar hleier ‘zo skiltruz... Kleier kêz, kenavo !
Kleier santel ma bro !

E pevar horn ar vered a zo²³ savet elven,
Ar groaz ‘zo kuzet e-kreiz ouz skourrou eun ivinenn
Skourr glaz an ivinenn.

Diwar tachenn ar vered gret sklinton ho c’hoari
Heb aon ebed, bugale, ma hunig da derri,
Gret sklinton ho c’hoari.

Ha banniel kaer ar pardon pa ray an dro pep be’,
Merhed kêz, ne gavfet ket en o zouez ma bez-me,
Ne gavfet ket ma be’.

Hag eo gwir eo red din-me leuskel ma yaouankiz,
Heb den da ouela ganin, na m’ dougen d’an iliz ?
Siwaz d’am yaouankiz !

Me ‘garfe c’hoaz eur wechig gweled ouz kient²⁴ ar porz
Ti ma mamm o vogedi hag azezañ ‘n he liorz.
Ti ma mamm ! al liorz !

Aotrou Doue, gwall garo, re haro da vervel

²² o vegelad : o richana.

²³ a zo : ez eus.

²⁴ kient : skalier.

Pell euz ar vro 'zo karet, ken pell a Vreiz-Izel,
Ma bro gêz Breiz-Izel !...

IV

Ar gourgammou-tan a strinke,
Eur vouez en neh c'hoaz a gane.

Kreiz ar bern-suill stignet uhel
E kane²⁵ gwerzig Breiz-Izel.

Emberr Perinaig, pa vougas,
He mignonez a daoulinas,

Ha paouezet mik da gana
E stagas a-grenn da ouela.

Kerkent eur burzud 'zo gwelet,
Ken ar Zaozon 'oe souezet :

Rag zo²⁶ staget eun avel tomm
Da hweza war o fennou plomm.

Ha savet an oll gand spouron
O weled ruz-tan ar Zaozon.

Ruz o zremmou hag o dillad,
Hag ar varnerien ruz 'vel gwad,

Ruz prezeger hag arserien²⁷,
Ha ruz tro-war-dro an dachenn.

Hag an iliz gand ar hleier :
« An tan, emeze, 'zo war ar gêr !

Ha gand eur hef²⁸ an diaoulou
A lakae tan e bolz an neñvou.

Ha pep hini 'grede zoken
E teve beteg e vouellenn²⁹ ;

Ken ar veleien 'hervoude :
« Honnez 'oa paourez da Doue ! »

Neuze zo³⁰ gwelet eun evnig,
'Mechañs ene Perinaig,

²⁵ E kane : kana a ree Perinaig.

²⁶ zo : ez eus.

²⁷ arserien : arsaillerien.

²⁸ eur hef : eur hef-tan.

²⁹ e vouellenn : e vouellou.

³⁰ zo : ez eus

O tarnijal euz an tantad
Ouz ar vignonez da gimriad³¹.

En-dro d'ar plahig eun ervenn³²,
Ruz-glaou 'r re-all en ervenn wenn.

Ha dre ma save d'an oabl splann
Diwar e nij an evnig glan,

'Torre d'an tan diwar e lerh,
Hent ar stered gwenn 'vel an erh ;

Ha kuñv war-gad ar baradoz
'Kane 'vel eostik Koad-an-Noz.

Setu c'hoaz eun dle 'zo laosket
Gand ar Zaozon d'ar Vretoned :

'Karo Saozon neb a garo,
Biken Breizad n'o fardono.

V

Hir an hent, hag an deiz 'zo berr ;
Bepred 'kerz ar plahig, skuiz-kaer.

« Karrer, lar din, en an' Doue !
Hag-eñ 'mañ pell c'hoaz ma bro-me ! »

Den ne daol lagad war he zro,
Pa n'entent den yez koz he bro.

War guz-heol bepred ar verhig
A gerz, he botou 'n he dornig,

Ha serret peb dor diraki :
« M' unanig on », 'lar ouz pep ti ;

« Eur vignonez 'm-oa, 'deus devet,
Hag er-mêz gante on taolet. »

Ha 'darre war an hent didrouz,
Ne glev nemed mouez eul lapous.

'Med eul lapous o filipad,
'Vel en em gleved 'reont er hoad ;

³¹ da gimriad : da gimjadi.

³² eun ervenn : eun ero.

Ha diaraog e nij ken skañv,
'N eur heiza flour, 'eneb d'ar goañv.

'Vel deski 'n hent d'ar baourezig ;
Ken 'soñj d'ene Perinaig.

« Perag, en noz-mañ tremenet,
Sakrist, ar hloh-kañv 'zo klevet ? »

« 'Vid eur baourez eo deuz ar vro
Dindan ar porched kat³³ maro.

E-unan³⁴ 'skoe an anaon,
Bete m'oe stipet ar vaz-kañ³⁵.

Diou 'oant o vond, bloaz 'zo ouspenn :
Doue 'oar petra deut eben³⁶.

Eun dra vurzuduz 'hoarvezas,
P'oe douaret 'kichenn ar groaz :

Eur horv du-kañ³⁷ a zo gwelet,
War ar bez eur plah astennet,

Ken obidou 'zo greet neuze
D'eben, 'mechañs, maro ive'.

Abae 'klever en ivinenn
'Eneb d'ar goañv daou evnig gwenn,

En o giz o kana seder
Gwerz Vreiz-Izel, 'me ar hleuzier³⁸.

Evnigou Brezi 'klever bemnoz
'Tre ar mor glaz ha Koad-an-Noz

Kenvroiz kêz, ar helou-mañ
Deoh euz a Bariz a gasan.

³³ kat : kavet.

³⁴ E-unan : O-unan. Faziou dore-skriva 'zo er skrid bet moulet.

³⁵ ar vaz-kañ : ar varv-kañv.

³⁶ petra deut eben : petra eo deut eben.

³⁷ du-kañ : du-kañv.

³⁸ hleuzier : ar hini a gleuz toull ar bez.

Ar re hlaz

Teñval an noz ‘vel toull eur bez,
Ar Chouanted ‘zo ‘n o hoazez.

En eur park don, en-dro d’an tan,
‘Vel er garreg, sioul, ‘r vorvran.

Eun huanadenn ‘zo klevet
Tu all ar hleun, ‘dreuz ar maged,

‘Vel da greiztez touseged mud
Pa hwistellont munud-munud :

N’e’ ket eur hristen ‘huanad,
Nemed ar gaouenn ‘kreiz ar hoad.

Kerkent hanternoz ma skoas,
En-dro d’ar hloz ‘sav re Hlaz :

Tapet ar Chouanted ‘n o zoull
‘Vel eur barr merien en eur poull.

Ne darnij ket al loened deun³⁹
‘Vid al louarn ‘tu all d’ar hleun,

Nikun ne spont euz ar re Wenn
O klevet garm ha youhadenn,

Hag o weled emaint tri-hant
En-dro d’ar park, ha prim ha drant.

« Glaouer, piou ‘zo ‘ta o vlejal
E koad Bear, ‘kreiz an noz dall ?

« Tri-hant a re Hlaz o leski
Kouezet en eur puñs-tan davervi. ».

Kleuzet e’ bet kleun ar park don
Gand ar Chouanted digalon ;

Ha neuze karget gand mouded
Ha gand merl⁴⁰ an tan goloet.

Kenta kammed ‘ra ar re Hlaz,
‘Vountont beteg o daoulin noaz ;

³⁹ deun : doñv.

⁴⁰ merl : maerl.

Ha pa lampont an eil kammad⁴¹,
Bete poull o halon ervad ;

D'an drived taol, int, o zri-hant,
Kuzet beteg o badeziant⁴².

A-dreñv, tri-hant a Chouanted
Gand pep hini eur forh houarnet

'Vid o distaol 'kreiz an tan ru',
'Vel en ivern 'ra 'n êlez du.

*

« Glaouer, perag 'h ez beure mad,
Da zeier leun, d'ar Poulleogad⁴³ ? »

« N'e' ket gand glaou, gand eskern e',
E' ma zeier karget hirie,

Eskern ar re Hlaz 'zo devet
D'ar stankou 'kasan, d'o bered. »

Ar zun war-lerh, e Menez-Bre,
Aotrou person Prad a lere,

'N-eus laret an overn drantell⁴⁴
Evid en ivern taol eur sell :

Tri-hant a re Hlaz a welas,
Ha tri-hant Chouant donnoh⁴⁵ c'hoaz.

⁴¹ kammad : kammed.

⁴² Kuzet beteg o badeziant : hervez an droidigez e galleg : beteg al leh ma oent bet badeziet.

⁴³ Poulleogad : eur stank an hini eo.

⁴⁴ drantell : war an tu-gin.

⁴⁵ donnoh : donnoh en izlonk.

Ar vorverh

Merhed Landreger ‘zo ken koant,
‘Vid melezouriou en arhant.

Hini ‘velkent ‘reas al lezenn
Evel unan ‘oa stoubinenn⁴⁶,

Eul lagad lemm, eun dornig fresk,
Eur horvig mistr evel eur pesk.

E ribl ar mor ‘oa he zi-plouz,
‘Leh ‘veze ‘wechou eur gwall trouz,

Ha na den na loen koulskoude,
Hag an nor digor en ti-ze.

Nemed gand eun darn ‘veze laret
Ar stoubinenn ‘oe diskennet

Evel eur vorverh er mor glaz
Da hoari gand ar pesked braz.

*

An amzer neuze ‘oa garo :
Gand ar re Hlaz an ilizo’.

Nez an ti plouz d’an abardae’
‘Weljed unan bennag aneze.

‘Daleg ma stoke d’an treuzo’,
‘Kleve ar hlaz o vond en-dro,

(War al lestr o koll ‘kreiz ar groz⁴⁷
‘Klev pep hini kloh e barroz) ;

Ma lakae eun troad en ti-plouz
Ar hlaz ‘gleve gand ar mordrouz.

En iliz Priel, dreist al lenn...
Oll o zagas ar stoubinenn.

Tri-hant ha pemp ha tri-ugent
‘N eur bloaz ‘tremenjont ‘tre he dent.

Dispennet an ti-plouz, ‘lerer

⁴⁶ stoubinenn : gast.

⁴⁷ ar groz : ar reklom.

Eur viñs zo bet kad er voger⁴⁸.

Hag a gase dindan ar mor :
Eur wech e-barz, n'oa neb digor

*

Ha merhed Treger 'deus brud fall,
Lakaet, 'mechañs, gand tud Vro-Hall.

War bez Brizeug

Notenn gand an oberour : Cette poésie a été dite au cimetière de Carnel, sur la tombe de Brizeux, quand fut inaugurée à Lorient la statue du poète, le 9 septembre 1888.

Pirhirin kêr, lavar din-me
Perag en Garnel e kane
'N noz-mañ an eostig 'uz d'ar be' ?

« D'an hanternoz eostig Karnel
Koantig, a gane da helvel
A-greiz e hun barz Breiz-Izel. »

Lavar din-me, touller bezio',
N'e' ket e bered Arzano
Eur goulmig 'vez klevet atao ?

« D'an hanternoz ouz skeud al loar
Bemnoz eh hirvoud gand glahar
Ar goulmig wenn o klask he far. »

'Vid an noz-mañ int darnijet,
Skañv 'vel eneoù diboaniet
D'an Oriant, an evniged.

Neuze zo⁴⁹ laret : an eostig
En-deus klemmet d'e wenn goulmig⁵⁰ :
« 'Baoe tregont vloaz on reuzeudig. »

Kerkent 'n-eus eur gomz dispaket,
Brizeug ha Mai a zo gwelet,
Eñ 'vel eun den reuzeudiget

Hag hi kaer 'vel eur blantenn hañv :
« Dre ma huñvre, klouar dezañ,
'Oan o hortoz an eured-mañ. »

He dornig flour 'vel m'astennas,
Eñ 'vel eur paotr flamm a deuas :
Ha da lugern bolz an neñv noaz.

Ha da gemer o nij neuze
A-du d'an neñv an daou ene...
Oll evnigou Breiz a gane.

Ha dreist al loar, dreist ar stered,
Da virviken int eureujet
E baradoz ar Vretoned.

⁴⁹ zo :e vez

⁵⁰ d'e wenn goulmig : d'e goulmig wenn.

Ne hirvoud ken da hanternoz
Nag ar goulm nag an eostig-noz,
Med 'kanont gwerz ar baradoz.

Mein-bez

(**Notenn gand an oberour** : Ils furent assidus au dîner celtique, Henri Martin, Samuel Urrabieta-Vierge - le beau Celtibère – Entrés à nos pardons dès la première heure, ils sont partis les premiers. Si nos larmes ne sont pas de vains regrets, que cet adieu soit doux à nos amis si tôt disparus !)

I Herri

Ar hleier en Breiz ‘hervoude,
An hekleo war-dro a lare :
« Piou a zo lakaet en e ve’ ?

« N’oa ket eur mab a Vreiz-Izel ;
‘Vel ‘teue ganim, da beb gouel,
A zo du-mañ ha kañv⁵¹ ha gouel⁵². »

Ha gand eur zonig a hlahar,
On mammig Breiz ouz an douar
‘Oe gwelet, ‘n he dioureh klouar

O luskellad korvig maro :
« An hini a gare on bro
Biken n’hen laoskin d’an Anko’...

Eet an ene da gad Doue :
Pe dreist al loar, ‘n ti an êle’,
Pe ‘mesk ar steredennou e’ ?

M’ ene, pa vo gwenn ha koantig,
Peleh ‘tremeno heh-unig ?
Me ‘garfe war galon mammig.

II

S. Urrabieta

Kousk da hunig, mignon klouar,
Da gorr dindan e veh douar,
Da ene paour ouz skeud al loar.

Bremañ da viken e kouski
Er vered, a-raog da gozni,
Prim falhet e-giz gwenn lili⁵³.

Kuñvoh an huñvre ‘barz ar be’
‘Leh e tremen ar vugale,

⁵¹ kañv : bet skrivet “kaon” er skrid orin.

⁵² gouel : gouela.

⁵³ gwenn lili : lili gwenn.

Pa zav an avel-abardae',

Ar vugale gand o homzou
A daol dreist ar mogeriou
D'an hekleo c'hoaz yez kêz ar vro.

A-greiz da hunig 'n ez pro pell,
Ra gaso koun dit an avel
Ouz kanaouennou Breiz-Izel !

On zadou-koz o-deus kanet
'Raog bezañ dre oll distaolet,
'Vel en Pariz ni on-eus greet.

Kaner flour, kousk da hun bremañ,
Ha da venez 'ray avel hañv
Da luskell d'hunig diwezañ !

III

Hamonig

Kouezet a-nevez 'barz ar Gêr-Vraz,
En on zouez eun nozvez 'deuas :

« Euz bro ar balan glaz on-me,
'Leh e klemm d'an noz ar freze⁵⁴ ;

Er biniou me 'oar c'hweza
Ha gwerziou koz 'm-eus da gana. »

Ha goude m'en-deus gwelet den
Na bet e ano klevet ken ;

Nemed eun devez zo⁵⁵ laret :
« Hamonig gand Doue 'zo eet. »

Tremenet 'vel ar wennilli
Goude bet kanet ouz on zi.

*

Mar klevet 'barz ar hoaziou don
Eur vouezig o leñva eur zon,

Son ar barz divroet e vo,
Dindan gazel-ge e kano.

⁵⁴ freze : efreiz. (labous).

⁵⁵ zo : ez eus bet

‘Wechou d’an noz war al lanneg
Eur horvig du ‘welfet o vesk⁵⁶ :

Eur paourig kêz ‘n e binijenn,
Kuitet e vroig da viken.

Ra vo sakñv ar hoabr o ruzañ
‘Uz d’al lanneier, en noz-mañ ;

Ha ra stoko didrouz ar mor
D’ar herreg en-dro d’an Arvor ;

‘Vid an tremeniad ma klevo
Ar barz o leñva er hoazio’

(Da ouel an Anaon)

⁵⁶ o vesk : o kantren.

An overn wenn

Hemañ 'zi eun dra erru mad
Etre Landreger ha Langoad.

Ken gwir erruet an dra-mañ
Hag emañ en neñv sant Erwan.

Ha diwall zo ouz an ivern
D'an hini 'deskas an overn

Hep he hana 'pad e vuhe' :
Eur wech maro 'ranko neuze.

*

D'eun nozvez eta eur mezhvier
Dre Lomikêl 'oa 'vond d'ar gêr.

Daouzeg taol hanternoz 'skoas :
Hag eñ dalhet war an hent braz,

'Vitañ en hent ne wele den ;
Nemed 'kleve tud o tremen,

Pe daou ha daou, pe tri ha tri,
O tond euz gardenn Minihi.

Na ger etre an eneo'.
Gand peb unan 'oa eur goulo'.

A-dreñv d'ar bale benniget,
E-giz eur manah dilerhet

'Teue eur hloaregig en gwenn,
'Vel da ouela, pleget e benn ;

'Vid lared e overn gentañ
'Mechañs 'teue gand ar re-mañ.

Burzuduz 'vije da weled,
Evel eun aoter kempennet

D'an ofisou kaner outi,
Sant Mikêl neuze lugerni,

Lugernuz an tour tro-war-dro,
Ar hloareg 'vel m'oe eet eno.

Hag eur burzud all e oa c'hoaz

An eneoù war an hent braz

Pep hini gand e houlou gwenn,
'Vid selaou an overenn.

*

Sav eta, sav, avelig noz,
Da gas beteg ar baradoz,

Evel pedennou an êle',
Ar hlemmigan a deu alese,

Pedenn ha klemmigan pinijenn
Evid ar hloareg en anken ;

Rag ar re 'bedjas evitañ
En o buhez, 'ra c'hoaz bremañ.

D'ar re garet e chom atao
Ha koun ha keun dreist ar maro.

Hag an avelig-noz neuze
Evel an ograou a gane.

'Uz d'ar goulou, pe 'vel ar groz⁵⁷,
Heb o moug, an avel-noz.

Ha goude ken burzuduz all
'Vije da glevoud en noz dall

En-dro d'an tour o houl digor,
'Vel ouz eul lestr, eun evnig-mor ;

Teir gwech 'oe klevet, en noz-se,
Klemm ar goulm-vor a darnije ;

Evel kloh-galv d'an overn-bred :
« *Introibo* », 'lare bepred.

*

'Deiziou war-lerh, eur baleer
'Houle⁵⁸ gand sakrist Landreger :

« Evid petra, teir noz a zo,
Emañ ar hleier 'vond en-dro ?

⁵⁷ groz : gwall-amzer

⁵⁸ Houle : houlenne.

‘Vid eun tangwall e’ marteze !
Evid danvez eur beleg⁵⁹. »

Eet d’ar bed all heb overniañ,
E vrall ar hleier o-unan.

Ha ne gavo ket eur holist
D’e ovis, eme ar sakrist,

Nemed eur mezhier, en hent don,
Ar pehed marvel ‘n e galon.

Siwaz ! ‘vid Ronan e’, maro
A-raog belegia ‘n e vro...

*

Mar deo erruet kement-se,
Ra soualjo ‘n Aotrou Doue !⁶⁰

⁵⁹ Evid danvez eur beleg :beleget e vo.

⁶⁰ Ra soualjo ‘n Aotrou Doue ! : ra soualjo an Aotrou Doue ene an hini n’eo ket bet beleget.

Landreger⁶¹

Setu ar harr-post a Wengamp
Gand e gezeg d'ar pevar-lamp.

Deut war o dor da glask kelou,
'Vel 'klevont ar grizillonou,

Ha tud Pontre ha tud ar Roh :
Drill-drill-drill, daou-ugent kloh.

Adarre d'an hent ar harr-post,
Pemp a ganfarded ouz e lost :

Na den goude, 'med dall ar forn⁶²
'Lez ar hoad astenne e zorn.

*

O vond neuze gand an dosenn
Eun tremeniad droas e benn.

E benn 'distroas da weled
An hent war e lerh hed da hed.

Pep tu d'an hent eun dastumm gwe'
'Leh al laouenan 'varvaille,.

Souezet hennez 'gavas penaoz
An hent braz 'dreuze koadou koz ;

C'hoaz ouz ar hleun, 'vel er hoadou,
Da dud vuntret 'save kroaziou.

Pe tro-war-dro c'hwez ar spern-gwenn,
'N eur hloz 'soñjas 'oa o tremen.

Amañ falherien 'dreñv d'ar gleud⁶³
O falh 'lemme gand eur mên treud ;

Hag i da lampad ar gleud voan,
C'hweh pe seiz, evdi mond da goan ;

Taolet filzier 'mesk ar melchon
'Barz an dumporell 'oa en hent don,

Ar paotr koz 'reas e daol skourje' :

⁶¹ Landreger : Bro Landreger, hervez an droidigez e galleg.

⁶² Na den goude, 'med dall ar forn : den ebed goude, nemed ar paotr dall a ra war-dro ar forn.

⁶³ d'ar gleud : d'ar gloued.

‘N dumporell a-raog, ‘r re-mañ goude.

Daou ha daou, skoulmet o divreh
War o halon, evel meneh,

Gand an dro-gorn pa’z int koachet,
Nemed an dumporell ‘oa klevet,

Stroñs ar rodou der an hent-karr,
‘Vel evid gori sklok ar yar.

Ar sklokeraj⁶⁴ en eur bellaad
Nemed an avel o c’hwilad⁶⁵

‘Klever hirvouduz, an avel
A ren dreist ar hleuniou uhel.

*

Ar re-ze ‘n o bugalerez
‘Deus selaouet on avel kêz,

Pe ‘klemm, pe ‘halv, pe ‘kan, pe ‘houel,
D’eur vouezig ker o komz heñvel.

Er goañv ‘vel kimiad an ene
Ha d’an hañv son ar garante’,

Biken ar re-ze n’ankouafont
Traoniennou Breiz a zo du-hont.

N’e’ ket c’hoaz eun draonienn ‘larfeh,
Ken tost d’an neñvou m’he gwelfeh,

Bolz an neñv ken izel ‘uz Breiz
Gand koabr evel listri e-leiz ;

Ha m’eo chouk⁶⁶ an neñv ken izel,
E kan ken koantig an avel.

‘Vel ar gurun sklêr ‘vez klevet
Pa dirog an oabl tost d’ar bed.

Da gement zo Breizad e plij
Mouez ar goabrenn diwar he nij.

Evuruz ar re ‘mañ o zi

⁶⁴ sklokeraj : sklokerez.

⁶⁵ c’hwilad : c’hweza

⁶⁶ chouk : izel.

War douarou ar Vreizidi,

O gwele war an draonienn-ze,
Evid goueliou re an oabl le⁶⁷,

Ar mor gand e houriz en-dro
'Vel mamm-goz o luskell atao !

*

Na spontet ket diwr ho tor
O klevoud trouz a-du d'ar mor,

Tud a Landreger, na grenet :
Don ar mor-ze, garo n'e' ket.

Ma fell deoh kleved an aod fall
Ar *gazeg hlaz* o hourinal,

Savet he moue 'hed ar stered,
An eon gwenn-kann distaolet,

Kemend a zoroh hag er hoad
Pa stourm ar bleizi 'kreiz ar gwad...

Mond pelloh a vanko neuze :
Hemañ eo mor an drugare'.

Neb beleg eno 'heuil ar groaz,
N'e' diskennet lez⁶⁸ ar mor braz,

Gand ar stol du, 'n e zorn ar beuz,
Da noui eur vag en he heuz.

Ar mordrouz 'deu gand ar wagenn
'Vid m'eo klemmuz, 'zo heb anken.

Eur vouezig 'glevfet ouz an noz,
Gwerz eur mesaer war ar roz.

'Wechou 'velkent 'vez leun ar poull,
Hag ar mor a diskuill eun houl,

Eun houlenn pe diou laosk er vro⁶⁹ :
Unan 'ya bete Pontreo,

Hag eben damdosta d'ar Roh,

⁶⁷ le : ehon.

⁶⁸ lez : war ribl.

⁶⁹ laosk er vro : mond a ra an heoulenn war ar vro.

Sioul ha klouar, na pelloh⁷⁰.

‘Vel dre heh hun ‘ra eur wregig,
Astennet ganti he brehig,

Ha dousig-dous ‘kreiz an huñvre
A lar ano he harante’...

*

Pa stagas ar harr-post e kêr
‘O *kouignaoua*⁷¹ ‘ti ar hleier.

Hag eur hloareg diwar e rez,
Breviel gantañ, ‘vond er-mêz :

« Demad deoh, hirie, ma mammig,
Setu ho mab da velegig.

D’ar zul, goude ar Zakramant,
‘Kanin m’overn-bred, ‘vel ‘po c’hoant. »

Outañ ‘selle ‘pad ar hlohad,
Eur verhig en eur galonad : :

« Gwennola, gwechall heh ano,
Ar baourez biken ne vleunio :

Eet he skiant gand Doue,
Aboe ma mab ‘zo eet ive’. »

En Breiz, e-giz homañ ‘zo kalz :
Ar Werhez, ra day d’ho frealz !

⁷⁰ na pelloh : ne da ket pelloh.

⁷¹ *kouignaoua* : *nedeleg*.

Noz an Nedeleg

Sonet an overn hanternoz ;
Ar gristenien eet d'ar barroz,
Nemed Yann Kouër 'zo 'barz an ti
Hag al loened er marchosi.

En oaled ar hef a hlaoue,
Ha Yannig Kouër a vorgouske,
Maro an tan e-bazr e gorn⁷²,
Alhwez ar hraou ganatñ 'n e zorn.

An Nedeleg pa'z e' kanet
A zo⁷³ bremañ tro al loened
Da darempred Mabig Jezuz,
Ar gristenien p'int eet da guz⁷⁴.

P'e' tremenet loened ar vro,
Da vond gante d'an ofiso'
Saout Yannig Kouër o-deus galvet⁷⁵ :
Siwaz ar hraou 'zo serret.

Hag int da hirvoudi 'n o yez
Ha da vlejal, al loened kêz !
A-greiz e hun e' savet Kouër
O kredi warnañ 'oa al laer.

Da nozvez ar Mabig Jezuz
Gweled ar hraou 'oa burzuduz.
Sklêrijennet 'vel eun aoter,
Hag an ejenn o prezeg kaer :

« Nemed an den hag an touseg
A chom kousket d'an Nedeleg.
An ti d'an noz-se 'zo prennet
Gand an Ankou 'vo digoret.

Klevet : daoust d'ar penn-tiegez !
E dreid 'penn⁷⁶ a-raog 'h ay er-mêz,
Dindan daou-ugent deiz 'vo red
Dougen ar penn-ti⁷⁷ d'ar vered. »

Ha daou-ugent devez goude,
Gouel ar Chandillour⁷⁸ 'oa neuze,

⁷² e gorn : e gorn-butun.

⁷³ A zo : ez eo

⁷⁴ p'int eet da guz : p'int eet kuit.

⁷⁵ Saout Yannig Kouër o-deus galvet : galvet 'oa bet al loened all gand ar zaout.

⁷⁶ E dreid 'penn : mond a raio er-mêz.

⁷⁷ ar penn-ti : mestr an ti.

⁷⁸ Chandillour : Chandeleur.

D'an overn-bred eet an oll,
Nemed Yann, paotr-ar-gêr bep taol.

Eun droig a ree 'n e brak braz,
Kloh ar *Sanctus* pa daoudaolas⁷⁹ :
Hag eñ da redeg aoza mern
D'e dud o tond euz an overn.

Med ouz e weled 'n eur park all
Eur hoele⁸⁰ 'zo krog da vlejal ;
Ar hoele war e lerh. Yann Kouër
'Oa stok e daoudroad ouz ar gêr

P'oe treuzet e gein gand taol korn,
Alhwez ar hraou gantañ 'n e zorn.
Hag en o hraou, eme ar vrud,
E vousec'hoarze al loened mud.

⁷⁹ daoudaolas :dassonas.

⁸⁰ hoele : hole.

Gwerz ar vartoloded

Dinn-dann-dinn ! ...Kloh an overenn
A zon abred war an dachenn.

Oberenn ar vartoloded
E Koz-Iliz a vez laret,

A-raog mond d'an Douar-Nevez,
Ar zadorn, d'ar peskerez.

Paotred ha plahed – *dinn ! dinn ! daon !-*
An oll d'ar chapel ya en kaoñ⁸¹,

Ar vugale gand o mammoo' ;
Hirie 'mañ ofis ar maro :

Ken hir an hent ha don ar mor
'Tre Douar-Nevez hag Arvor !

*

Perag 'mañ Perinaig Al Laz
Teir gwech oh ober sin ar groaz ?

« Ne welet ket ar gevridenn
O steui 'dreg ar Werjez wenn ?

Kevridenn veure 'zo chañs fall... »
« Ha ma huñvre ! », eme eun all,

'Me gwreg Ar Morvan. Da douller⁸²
'Oa eet ma gwaz, 'leh pesketaer : »

« Ya, da douller eet Ar Morvan,
Da douller beziou, en noz-mañ ! »

Hag eun all, gand he hrouadur :
« Faotet ganin ma ziladur⁸³,

Ar yod-kerh aozet evid mern :
N'e' ket eur merk euz an ivern ? »

*

'Pad ar plahed a diougane,
Ar vartoloded a bede,

⁸¹ kaoñ : gwisket en kañv.

⁸² douller : touller beziou.

⁸³ Faotet ganin ma ziladur (?) Hervez an droidigz e galleg : Ma bleud distrempet ganin, ez eo bet pilet ganin.

Pleget o fenn ouz an aoter,
'Vid na gavjent an droug-amzer.

'Pad ar merhed a douge klemm,
'Krogas unan, eul lagad lemm,

Da hoarzin, ken 'o ruz he jod,
Ha ken 'krogas eur martolod.

« Daonet 'vo Doue ma ene !
Da varvaillad 'teuer ti Doue ? »

Ar person, laosket e ofis,
A hourdrouz en Koz-Iliz :

« N'e' ket ho leiou Doue c'hoaz
'Day a-benn euz ar gazeg hlaz.

Henez 'n-eus kredet droug-pediñ,
Dindan al lamp⁸⁴, war e zaoulin.

A ranko lared e *gredo*... »
Job Kerarbrun 'oa e ano ;

Ha 'vel eur hristen a-feson,
Jobig sentas ouz e berson.

*

Person Planiel 'oa eur zant,
Droug eun tammig d'ar merhed koant :

« Ha c'hoaz e vank d'ar hoarzerez
Dond en pinijenn. Piou honnez ? »

'Vid an dro-ze, kalz da hoarzin
O weled mond war e zaoulin.

Gwregig Kerarbrun, 'n e gichenn,
O-daouig d'ober pinijenn.

Pep hini, moarvad, a hoarze,
Nemed Kerarbrun, eñ ne ree.

*

Pell int bet war vor gand o zro.
Ha Job kêz n'e' ket deut en-dro....

⁸⁴ al lamp : ar gleuzeur.

Kanaouenn ar miliner

E Milin-Vor 'oa eur vatez
tik-ha-tak,
Glaz he lagad ha flour he mouez
tak-ha-tak ha-tak-ha-tak.

E Milin-Vor 'oa eur paotr-karr⁸⁵,
Leun e borpant ha reud e harr.

D'ar zadorn-Bask, greet he hrampouez,
Da glask he fastig⁸⁶ hi a yeas.

An absolvenn hag hi 'deus bet ?
Hini 'r paotr-karr ne laran ket.

Ken ar paotr-karr a-raog nao miz
'Laoskas ar vatez war he giz.

Eun deiz, lemmet e vein gantañ,
Ar miliner 'lare koulz koan :

« N'ouzon ket, abaoe diou noz 'zo
An durbinenn⁸⁷ n'a ket en-dro ;

Abaoe diou noz 'zo, eur vouez e',
Klemmgan er stank *miserere*.

Sordet⁸⁸ eo ar vilin ha ni :
Aotrou Person, dizordet hi⁸⁹. »

Ar vatezig, 'vel m'hen klevas,
Gand an diri d'an neh 'bignas ;

Ha d'een em daol euz ar hrignol
Euz leh he-doa taolet he bugel.

Dre he mennoz a zo laret⁹⁰
He hrouadur 'deus badezet ;

Pe dre mennoz e vamm ma e',
'Mechañs a-berz 'n Aotrou Doue :

Hag en noz war-lerh ar vouezig
Benedictus 'gane koantig.

⁸⁵ eur paotr-karr : eur chalbetour. Arabad kemmeska gand "e harr" e diwez ar werzenn da heul.

⁸⁶ he fastig : komunia.

⁸⁷ An durbinenn : ger galleg : la turbine.

⁸⁸ Sordet : strobinellet.

⁸⁹ dizordet hi : distrobinellet anezi (ar vilin)

⁹⁰ a zo laret : e vez lavaret gand an dud.

Evdi paotr-karr ar Vilin-Vor
tik-ha-tak
Er galeou 'mañ o koll gor'⁹¹
tak-hatak-ha tak.

⁹¹ o koll gor : o koll gor evid ar merhed.

Pok ar maro

Klevet hoh-eus pe burzud braz
E Breiz-Izel a hoarvezas.

*

Kaer ar plahig 'vel steredenn,
Evel eun evn ar paotr laouen.

« Naig, Naig kêz, laret din,
Hag e miz Gouere on dimezi ?

« Neuze on daouig d'ar bloaz-mañ
'Rafem pardon Santez Anna.

« Me 'vo hualet p'am-bo c'hoant »
Evel-se 'komz ar plahed koant.

Da viz Gouere, bleun er parkou,
'Toull an nor 'stokas an Ankou.

*

Arabad e' goude kañvou,
Daou da darempred ar beziou ;

Ar re varo 'deus kasoni :
O hun n'e' ket mad da derri.

« Gwell 've ma lakaad en douar
E-leh Naig ! », garme he c'hoar.

Hag ouz he hleved 'oa truez
Heb galloud kuz⁹² he harantez.

D'an abardaez, eur horv kasti'
Da zevel euz ar geled pri,

Hag a daolas e liñsel wenn
Gand an daouig war ar yeotenn.

Kased⁹³ daou arched da Naig,
Evid he dous hag he c'hoarig.

*

⁹² kuz : kuzad.

⁹³ Kased : Kaset e oe..

Bremañ emaint o-zri kousket,
Naig e-kreiz, memez bered.

Tei ivinenn 'zo krog eno
Tri evnig-noz 'gan er branko'.

Neb a dremen dindan ar gwe'
'Stag da ouela heb gouzoud deze.

Huñvre

A-walh tridal, ma halonig !
Tav, paourig-kêz, kousk ha tav mik...

*

Kelou 'm-eus bet deuz ma hoantiz⁹⁴,
'Zo eet eun devez gand he giz,

Ha war ma lerh deut d'ar Gêr Vraz
Ouz ma hlask pe d'am gweled c'hoaz.

Tost d'an iliz, 'vid he gortoz,
'Oan o vale, 'vel 'reen bemnoz ;

Hag hi da dremen : Doue 'oar,
Eur plah a zell yen pe glouar.

Ne ger 'trezom ; nemed raktal
'Kuzas en iliz 'vel gwechall.

Gortoz 'oa din diwar an hent :
Mouchet eo din Doue ha sent ;

'Baoe 'm-eus kollet ar garante',
Ha laosket baradoz Doue...

*

'Vid an noz-se 'oan dihunet
O klevoud gouela ouz an oaled,

'Korn an oaled eun êlig gwenn,
Eun alhwez aour en e gerhenn,

Moarvad alhwez ar baradoz,
'Leh e nijas d'an hanternoz,

Nemed 'oa deut, 'vid kimiadi,
Eur verhig kaer evel lili....

*

Setu 'vo ugent vloaz bremañ,
'Noz eo maro⁹⁵ 'm-eus an huñvre-mañ.

⁹⁴ hoantiz : an hini a garan.

⁹⁵ 'Noz eo maro : An noz ma varvas.

Tud vad, p'em havet ma-unan,
'Vin o leñva d'an anaon.

N'am dalhet ket, m'hoh-eus true' :
War zeuliou ma dous 'vin neuze.

Son an nevez-amzer

Moualhigh-noz, pa glevan da zon – o son,
E sav an anken em halon ;
'Vel eul lestr war ar mor, d'an noz – bemnoz
'On ma-unan e-kreiz ar groz.

Daro⁹⁶ el lanneg ar bleuniou –daro
Gwisket a-nevez ar hoajo' ;
Ar pardonioù a zo digor : - digor.
Deut 'ta, merhed, war doull ho tor.

An nevez-amzer c'hoarvezet – abred,
'Mann daou ha daou al lapoused,
Al lapoused o klask eun neiz – o neiz,
'Vel er pardon tud yaouank Breiz.

Tomnder an neñv hag e vammig – mammig
'Mêz e bluskenn 'tenn an evnig ;
Ouz ar ganfarded re haro – garo.
Evnigou, Doue d'ho miro !

Pa vo kresket o diouaskell, - eskell,
'N eur gana 'tarnijfont uhel ;
Al lapoused 'zo da Doue, - 'vel me⁹⁷,
'Vel on dalhet d'am harante'

An nevez-amzer 'zo joauz – joauz
Nemed d'ar re garantezuz,
D'ar re 'zo pellaet da viken – biken
Ha gouestlet o-daouig zoken...

Tav 'ta c'hwistellad, moualhigh-noz, - bemnoz.
N'on ken, siwaz ! ouz hen gortoz ;
Trohet e' ma nevez-amzer, - a-verr :
N'eus den ouz ma gortoz er gêr.

⁹⁶ Daro : Adarre.

⁹⁷ 'vel me : galleg. 'veldon-me.

An distro

Distroet on da di ma zad

La la o la di ra

Distroet on da di ma zad,

Daerou kement 'n on daoulagad

'N deiz m'oan ouz o huitaad.

'Leh 'zo⁹⁸ bet anken ha daero'

La la o la di ra

'Leh zo bet anken ha daero',

E ti ma zad, deiz ma distro

Den n'ouie ma ano.

Goude 'welis ma mignoned,

La la o la di ra

Goude 'welis ma mignoned :

A-raog tregont vloaz tremenet

Bleo gwenn ha baro louedet ;

Hag i, paotred, 'oe sonn o fenn

La la o la di ra

Hag i, paotred, 'oe sonn o fenn,

Nikun n'am zellas 'vid astenn

E zorn 'vel diagent.

Hag el leh emaint on gortoz

La la o la di ra

Hag el leh emaint on gortoz

'N o gwele pri⁹⁹ on zadou-koz

Sioul ha deiz ha noz.

E bered ma bro 'ta bet on

La la o la di ra

E bered ma bro 'ta bet on ;

Eno 'tre ma oll anaon

'Soñjen, siwaz ! d'unon¹⁰⁰,

Eur plahig koant pa oe 'n he bleun

La la o la di ra

Eur plahig koant pa oe 'n he bleun ;

Biskoaz n'e' bet ma halon leun,

'Baoe outi m'on en keun. :

Re gaer 'vid chom pell er bed-mañ

La la o la di ra

Re gaer 'vid chom pell er bed-mañ,

⁹⁸ 'zo : tregerieg : ez eus

⁹⁹ gwele pri : er vered, en o bez.

¹⁰⁰ d'unon : unan (evid ar rim)

Hag eet gand Doue, ‘vel bleunhañv¹⁰¹
‘Raog serr-noz o plegañ.

Kaer am-eus bet klask en dachenn¹⁰²
La la o la di ra
Kaer am-eus bet klask en dachenn,
Na kroaz, na bez, na gwenodenn,
Netra ken ne gaven.

Nemed eur wezenn, en he beg
La la o la di ra
Nemed eur wezenn, en he beg
Eun evnig savet deuz e bleg¹⁰³
Gand trouz ma zreid *flik-flek* ;

Hag al lapous ouz ma gervel
La la o la di ra
Hag al lapous ouz ma gervel
Ik-ik ‘lare, ‘vel ar bugel
D’e vamm en e gavell.

Rag an nebeudig¹⁰⁴ a garer
La la o la di ra
An nebeudig en em garer
Da vugale c’hoaz e teuer,
Evnigou dibreder.

Na ma fedenn p’am-eus laret
La la o la di ra
Na, ma fedenn p’am-eus laret
Ha d’an neñv darnijet.

Ma ene paour day¹⁰⁵ da evnig
La la o la di ra
Ma ene paour day da evnig,
Ha war ar brank gand ar plahig
‘Leh e kanfom *ik-ik*.

¹⁰¹ bleunhañv : fleur an hañv.

¹⁰² en dachenn : er vered.

¹⁰³ e bleg : e glud.

¹⁰⁴ an nebeudig : an nebeudig amzer

¹⁰⁵ day : a deuiio da veza

Baro spern hag ivin

I

An deiz m'on eet pell euz ma bro
D'an oll 'm-eus laret kenavo.

Hag o tremen ouz ar vered
Da droad ar groaz on daoulinet ;

Eur garlantez spern ha lili
Am-eus bountet en douar pri.

Eur bodig-spern, 'vid e gempenn
Staget tro-ha-tro lili gwenn ;

Pedet 'm-eus an Aotrou Doue
(Ma klev Doue ar bedenn-ze)

« Honnez a dalh ma halon baour
An Ankou ra day d'am zikour.

Evid an anken d'he starda
Eur wech ma ve dezi d'am ankoua !

Evel eur sparl e rod ar harr
'Treuzo bod-spern kalon digar.

Ha 'mesk lili gwenn heh ene
D'ober he foan 'chomo noz-de' !

Hag e c'hoarvezfe din kemend-all !...
Diwallet ouz pedennou fall.

'Raog 'oe dizehet ar bod glaz
Ha gweñvet lili 'troad ar groaz,

'Troas he fenn d'ar plah yaouank :
Gouelet am-eus, 'vel ruill ar stank.

Ma dousig koant am-boia gouestlet,
Ha d'an Ankou 'z eo dimezet ;

E bered on farrouz bermañ
E kousk heh hunig diwezañ.

II

O vond en hent, hep tra da frealz ma halon,
'Trohis eur bod ivin e ti an anaon.

Barr ivinenn goantig, c'hwez vad az-teus laosket

‘Vel louzou war gouli d’ar paour-kêz divroet !

Pa zav ma nehamant ‘vel avel-kroz war vor,
Boudig an anaon degas koun ouz Arvor.

N’eo ket an aod du-hont, ha pelloh al listri,
Ha tro trêz, diwar nij, o koagal ar brini ?

E-kreiz ar hoadou frank an evned a diroll,
Dreist kribell ar menez a-raog ma kuz an heol ;

Skiltr eo dre an hent kleuz taol skourjez ar glaouer,
Ha mouez ar foeter-bro pa gan ken dibreder.

War-dro koan, ouz ar skol war an dachenn uhel,
Me ‘fell din kleved c’hoaz mamm-gêz ouz ma gervel.

Ar hleier a vrañsell : ‘vid an orvern-bred e’,
Evel eur vadeziant, pe d’eur hañv marteze ;

Kempennet an iliz, ha setu ‘tond er-mêz
Eur rumm merhed en gwenn, ‘vel da ouel ar Werhez :

C’hweh ‘doug o mignonez d’he bez ‘zo war ar roz,
C’hweh all ‘gan gwerz ‘digor dor ar baradoz...

Bemnoz ‘arsav moueziou ‘zo mouget da viken,
Pa bar ma daoulagad war ar bod ivinenn.

III

Me ‘gar dindan skeud ar stered
Heulia kourmoul en oabl stignet,
Bale d’an eneu poaniet.

Gwragez ‘m-eus sellet eur vandenn
O vond en du, goueliet o fenn ;
Unanig a zemplas a-dreñv ;

D’he halon ‘tougas he dornig,
‘Leh eur spennenn a dreuze mik,
Ha bleun lili ‘beg ar bodig.

Ha klevet ‘m-esu ‘vid an noz-se
Eur vouezig kuñv dre ma huñvre,
Ken truezuz din a lare :

« Mar plijfe deoh sevel ma foan,
Distrofet war ma bez buan,
‘R barr ivin ‘vountfed hoh-unan... »

Evid he havoud, Doue 'oar,
'Afen dre eur mor a hlahar
Pe tan ar Purgator dispar ;

Me 'oar ivez 'oe miret din
P'emañ en enkreiz, bete m'in
D'he diboania war ma daoulin :

Ha p'am-mo savet heh anken,
War ar hoabr skañv n'hirvoudo ken,
Na biken n'he gwelin, biken...

Ha didruez on 'ta, siwaz !
Ma finijenn-me 'vez re waz !...
Dezi me 'dougou 'n ivin glaz

P'am galvo Doue ma-unan ;
Ha d'he zro 'treuzo ma halon
Gand he spernenn ; ra dreuzo don !

Ha war he lerh m'ene poaniet,
On-daouig ouz skeud ar stered
Gand ar houlmoul 'afom bepred.